

(37)

Da Vemor
 An Authou 'n Abat a Lansalut,
 Maloni eus a Iles ay Itron Varia ar Vur a Vontroulez,
 eus a Meaux hac a Guemper,
 Person Garlan;
 Mado e Montroulez, ay 19 eus a vis Mae 1846, hac entèret
 en deiz varlerc'h en Garlan da bemp. heur eus ay nôs.

O devez a c'hlac'har! ne velomp tro-vardro
 Nemet tristidiguez, var bisach tud ar vro....
 An Abat Lansalut, qer caret gant an oll,
 Allas! ô va Doue, a rancomp dont da goll!
 Na glêver, var ar miz hac en qer, nep seurt brut
 Nemet: Maro eo-ta ay Abat Lansalut!...

(38)

Peguer bras niver tud, direded a bep tu,
 Vardro Sant-Maleni, pen-da-ben dre ar ru,
 A voa en em gavet da vesca o feden
 Gant ar c'hân a varo demeus ar vèleyen!
 Euy dever just e voa dont eno da bedi
 Erit euy den qer mad, qeruziet a bep-hini.

Pa bartias ar c'horf erit mont da C'hardan,
 E voe heuillet gant calz a vignonet dezan,
 Pere n'er c'huitajont, oll carguet a c'hlac'har,
 Qen a voe e gorf pasour dispennet en douar.
 Harp d'an Authou David eo laqet da repos:
 O eneo a zo en joa ar barados.
 En em garout a rent evel daou qier vignon;
 Eur vadelez meurbet a voa en o c'haron.
 Dorn Doue en devoa e qunduet dezan:
 Madelez ay Abat a voa bras eritan.
 Goude beza santet trubuilhou eus ar bed,
 Evel eun hillsen e voa en em staguet
 Ouz ay den jenerus, p'ini n'en d'oa qen c'hoant

116

Nemet da glasq bepret dont d'ey renta contant.
 Gant e daou e meus bet alies comzet ;
 Va c'halon a zanten en c'hreiz joais mervet
 Pa deuen da zelaou an eil hac equile,
 Hac o velet penos voa bras o c'harante .

Er güelet hon eus oll, n'eus fors dre bez amzer,
 O tout gant eur soign vras da goressat en qer :
 Nac ar brassa tomder, nac ar yenien vras
 Na elfont en ampech, daoust d'e oll boan, sivoas :
 Peur-gontant an oll a voa e c'hoant vrassa,
 En despit d'e scuüder, alies ar goassa .

(39)

Pelec'h cavout eun den qer mad, qer generus ?
 Dignoc'h eus ar garg caer a Vinistri da Jesus ?
 E blijadur vrassa, c'houi er goar, christemien,
 A voa, en peb amzer, ober vad d'ar beorien .
 Na pebes niver tud, en o c'hoession,
 A recevas outan peb consolation !

Charlanis maleivrus ! c'houi a goll eur güir dad ;
 Mes ni ivez, allas ! a goll eur mignon mad .

Daou vloas ha tregont zo ho poa - en da Bastor :
 Ha c'houi oc'h eus biscoas güelet etal e zor
 Ar paour qez ezommes, hep beza soulajet
 Gant an den venerabl a rancomp divoeret ?
 Atao o receive equis e rugale,
 Hac o rente contant ha joais hep dale .
 E fezon d'o receo, qer franc ha qer laouen,
 A laje anêze d'ancouat o anqen .

(40)

Ma vije nep souci etouez tud e barres,
 E cavet en Abat güir queleennadurez,
 Ha contant da zonet da zenti d'e gomzou,
 En em gavet eivrus da heull e quzulliou .
 Mar tigueje unan e zanvad dianqet,
 Equis eur Pastor mad e rede d'e gavet,
 Hac e comze outan gant qer bras madelez,
 M'en em rente souden da eur seurt carantez .
 Biscoas den, a gredan, goude en darempret,

Na ellas qet mancout da zonet d'e garet.

Ne gredân qet beza bigen dislavaret,
 O credi e vezo meurbet dies cavet
 Eur Pastor qen carus equetân birvigen:
 Graç d'êc'h, Garlanis qer, d'er possedi souden.

(41) Unanet oll hirio en e servich eiz de,
 Domp brêmâ d'an daoulin da bedi var e ve;
 Trugarecomp Doue, rentomp dezân enor
 D'er beza bet qeit all evit hor giür Pastor,
 Ha pedomp hor C'hrouer ma zayo da repos
 Etouez an oll œles en gloar ar Barados.

Miromp en hor c'halon memor an Abat qer;
 Ra vo present deomp oll atao en peb amzer:
 Memor eur Pastor mad zo qer da bep christen:
 En Abat Lédanet hor bo souch da vigen.

Eur mignon d'an Oustron 'n abat.
 A. Lédan.

(Vol. VII, p. 37-41.)